


# PEGEN KAER EO MAMM JEZUZ

H. De la Villemarqué

Ton : Bale Arzur



1. La - var din - me, dén an Ar - vor,  
 2. La - var din - me, dén an Ar - goad,  
 3. La - var din - me, dén an A - re,  
 4. La - var din - me, paotr an deñ - ved,  
 5. Li - vi - rit din, tud ar mê - ziou,  
 6. Li - vi - rit din, bu - ga - li - gou,  
 7. Nag en Ar - vor, nag en Ar - goad,



1. Ha ken kaer eo da vag war vor  
 2. Ha ken kaer de - liou glaz ar c'hood,  
 3. Ha ken kaer eo lein ar me - ne,  
 4. Hag - hen 'z eus ste - re - denn e - béd  
 5. Ha ken kaer eo ar gla - zen - nou  
 6. Er pra - jou o ku - tuill bleu - niou,  
 7. Er me - nez, en oabl nag er prad,



1. Gand he goue - liou gwenn - kann di - gor?  
 2. Pa zeu eur bann - heol d'o sklér - raad?  
 3. Gwenn - kann gand an erc'h d'ar beu - re?  
 4. Ken kaer en noz ste - re - den - net?  
 5. O lin - tra gand ar gli - zen - nou?  
 6. Ha bleun ken kaer 'zo er pra - jou?  
 7. Ne - tra ken kaer, ne - tra ken mad!

# PEGEN KAER EO MAMM JEZUZ

*Diskan :*

**Pegen kaer ez eo Mamm Jezuz !  
Pegen dous ha trugarezuz,  
Pegen mad ha madelezuz !**

1. Lavar din-me, dén an Arvor,  
Ha ken kaer eo da vag war vor  
Gand he goueliou gwenn-kann digor?
2. Lavar din-me, dén an Argoad,  
Ha ken kaer deliou glaz ar c'hoad,  
Pa zeu eur bann-heol d'o sklêrraad?
3. Lavar din-me, dén an Are,  
Ha ken kaer eo lein ar mene,  
Gwenn-kann gand an erc'h d'ar beure?
4. Lavar din-me, paotr an deñved,  
Hag-hen 'z eus steredenn ebéd  
Ken kaer en noz steredennet?
5. Livirit din, tud ar mêziou,  
Ha ken kaer eo ar glazennou  
O lintra gand ar glizennou?
6. Livirit din, bugaligou,  
Er prajou o kutuill bleuniou,  
Ha bleun ken kaer 'zo er prajou?
7. Nag en Arvor, nag en Argoad,  
Er menez, en oabl nag er prad,  
Netra ken kaer, netra ken mad!

*QU'ELLE EST BELLE LA MÈRE DE JESUS !*

- R: *Qu'Elle est belle, la Mère de Jésus !  
Qu'Elle est douce et miséricordieuse,  
Qu'Elle est bonne et compatissante !*
1. *Dis-moi, homme de l'Arvor,  
Est-Elle aussi belle, ta barque sur la mer,  
Avec ses voiles blanches ouvertes ?*
  2. *Dis-moi, homme de l'Argoat,  
Est-Elle aussi belle, la verdure des bois,  
Eclairée d'un rayon de soleil ?*
  3. *Dis-moi, homme de l'Arrée,  
Est-Elle aussi belle la crête des monts  
Toute blanche de la neige matinale ?*
  4. *Dis-moi, petit pâtre,  
Y aurait-il une étoile  
Aussi belle en la nuit étoilée ?*
  5. *Dites-moi, hommes des campagnes,  
Sont-elles aussi belles, les pelouses  
Toute scintillantes de rosée ?*
  6. *Dites-moi, petits enfants,  
Qui cueillez les fleurs des prés,  
Y trouvez-vous une aussi belle fleur ?*
  7. *Ni en Arvor, ni en Argoat,  
Ni sur la montagne, ni au firmament, ni dans le pré,  
Rien n'est aussi beau, rien n'est aussi bon !*